

DISPUT

ENTRE

SIMON AR GONTEL GAM

HA

POL AR PRI,

VAR SUJET AR BUTUN.

DEDIET

*Da guement Fri-Butun, Fumerien ha
Fumerezet, Chigerien ha Chigerezet
a zo en Breiz-Izel.*



E MONTROULEZ,

E ty LÉDAN, Impr., e ru Pont-au-Itron-Varia.



AR BUTUN.

Biscoas me ne meus cavet mad
Netra evel eur c'hornedad;
Hac ec'h assuràn, hep abeg,
Oun cürus pa meus corn em beg.

Dreist oll, pa velàn ar moguet,
Pa vez an tân em c'horn croguet :
Neus netra qer majestuus,
Hac a rent muioc'h evurus.

Allumettez chimic, mein-tân,
Deut da dana va c'horn buan,
Rac hast bras a meus da fumi,
Ha da beur-domma beg va fri.


Butun corn, butun fri, chiqen,
Zo implijet en peb tachen;
Ha forç buredaden a gûez
Er zouben, er yod, er c'hrampoez.

Ar Butun a ro sònjou mad,
Hac a blij d'an dud a bep stad;
Rac, pa strêfier, ni lavarò :
Doue, paour qèz, d'ho penigo.

Fumomp, prizomp, chicomp eta,
Qeit ha ma zomp var ar bed-mâ;
Rac er bed all na ouzomp qet
Peseurt Butun zo demp miret.

Propriété.





DISPUT

ENTRE

SIMON AR GONTEL GAM HA POL AR PRI,

VAR SUJET AR BUTUN.

SIMON.

DEIZ mad did, Pol ar Pri, te ê va mignon qer;
Eur goal vrud vrasa zo ac'hanouter c'hartier.
Glêvet' meus lavarat gant eun den eus va zi
E voas bet o touguen pêvar fals-testeni,
Hac evit recomañ eus da grim effroyabl
E poe un onz Butun : te zo eur miserabl.
Ma na gueres divoal, abars fin ar zizun
Ec'h êruo ganet suravoalc'h goal fortun :
Crouguet e vi certen, ma na gueres divoal ;
Douguen fals-testeni a zo eur vicher fall.
Nout qetsur ur pot coant mes maves-te crouguet
E vez divalooc'h suravoalc'h c'hoas rentet.

POL.

Goassoc'h a meus-me grêteguet eullombardun
En em roas d'an diaoul evit cavet Butun,
Hac a voe en ifern epad mis goengolo
O servicha Lucifer epad ma voe eno.

SIMON.

Onnes zo eur fablen ha ne dê qet güirion :
N'en em ro den d'an diaoul eus a greiz e galon,
D'an drouc-speret infam evit cavet netra :
Ober goab a fell did ; mes did ê ar goassa.

POL.

Ropeoc'h, mabcagn diot. Mavez-te Butuner,
Hirio e mâ ar yaou ha varc'hoas ar güener,
E crifes, m'en assur, a nerz da gorzaillen :
Eur paour qèz cornedad pe eun tamic chiqen !
Ma vancse did Butun, aben varc'hoas da nôs
Te a güitasse crenn da lod er Barados.

SIMON.

Va choqi bras a res, den excumunuguet.
Pa ven goassa Butuner' voe biscoas var ar bed,
Ne garfen qet sônjal er pez a lavares :
Güel' ve ganén mervel ha caout mil dienez,
Ha qüittât ar Butun evel eun ampoeson,
Ma ve caus din pec'hi hep nep güir na rêson.

POL.

Ia, te lavar ze, pa n'en dout qet sujet,
Na custum da vutuna en nep fêçon abet;
Êzet e did cozeal, pa ne zantes ar boan
En deus eur Butuner hep na Butun na tân.

SIMON.

Me a garfe gouzout penos na pe fêçon
Ê deuet da guenta ar Butun er c'hanton,
Rac eul louzaouen ê zo caus da vil bec'het,
Ha casimant an oll a vutun dre ar bed :
Ar yaouanqis a fum, peb ozac'h ha peb greg,
Ha betec a zo qen eur c'hos tam mic'hieg.

POL.

Oh ! pez graç a roas Doue d'ar gristenien,
Pa zigassas ar Butun da zoulaji o anqen !
Penevert ar Butun, calz a golje o sqient :
Bet zo Butunerien hac a zo bremâ Sent.

SIMON.

Te lavar gaou em faç, mab hena Lucifer,
Biscoas ne zeus bet Sant a vije Butuner ;
Ne zeus qet er Scritur nac en histor abet
E ve^reur Zant Butuner hac a voe sovetet.
Nan, nê qet possubl ve er barados nicun
Hac en defe biscoas bet caret ar Butun.

POL.

Penos, den maleürus ! ha te alfe souten
Ne voa qet Sant Vaze mestr d'ar valtouterien,
Nac e voe er Judee e receo an tribut
Diouz argüin, ar butun, bemde digant an dud ?

SIMON.

Me vel ne ouzout qet an histor-ze ervat.
Sant Vaze, p'oe galvet, a chenchas prest a stat ;
Rac ma vije bepret chomet da valtoutier,
E vije deut hep douet eur prinç da Lucifer ;
Ha c'hoas ne gomzer qet eno eus ar Butun,
Nemet m'er recevet dre an taillou commun.

POL.

Nê qet ret mont qeit-se da glasq an historiou,
Evit gouzout piou voe en digassas er vrô.

Frances-daou a hano, Roue demeus a Franç,
A hanvas da gannad Nicot, den a brudanç,
Evit lez Bastien, Roue ar Portugal,
Pini, evit presant, a roas deàn ractal
Butun scaferlati, rol moan, cigarennou,
Butun poultr, Virjini, hachet, carotennou.

Nicot d'ar Rouanez a roas eur brizen,
Ma commanças Mari stressial dre an daou ben,
Ha qer stard e stressias, ma zeus bet lavaret
E frêgas he robe ; mes n'oan qet o velet.

Ne devoà tam yec'het abaoue pell a voa,
Ha ne rê ouz netra an distêra tam joa ;
Bea' voa attaqet gant ar boan daoulagad.
Goude bea implijet meur a vedecin mad,
Oll e lavarjont dêi e colje ar güelet,
Mes Doue a zigassas ar Butun beniguet
Evit he zoulaji hac he renta pare,
Ha calz istre' viti zo bet yac'h goude ze.

SIMON.

Güir ê, peb seurt louzou zo cronet gant Doue,
Hac hini ar Butun en deus eur vertus cre ;
En eur remed benac ec'h elfe servicha,
Hac avichou' heller certain en implija ;
Ha pa ve-hi laqet da ober ongantchou,
Ê mad d'eur mempr toret hac eus ar gouliou.

POL.

Ar Rouanez a Franç ne voa qet gouliet ;
Ne devoa bless abet na nep ascorn toret ;
Ne zante poan ebet nemet poan daoulagad,
Ar Butun he yac'heas hac he laqas ervat.
Ouspen ze e zê mad eus a bep seurt clévet :
Chasseal' ra'r c'hatar ha scànvât ar speret,
Hac ouz ar velconi e soulaj calz an den
En dese'r boan benac, eur spont pe eun anqen.
Anfin, n'eus pezh clévet a deu d'hon attaqi,
Ar Butun, dreist peb tra, a deu d'hor zoulaji.

SIMON.

Va choqi a res bras, den excumunuguet,
Lavarat e teu'r Butun da scànvât ar speret :
Er c'hontrol ê : troublet e ve dre nerz ar Butun,
Mesqet ha barbouillet evel glao ha curun.

POL.

Gaou bras a lavares, Doue d'am pardonno ;
N'eus qet a dud santel na savant' bars er vrô
Na implijont Butun pe en corn pe en fri :
Eus a oll dud ar bed, a bemp e vutun tri ;
Ha c'hoas e lavaràn gaou ouspen an anter,
Rac mavegrêteur roll partout dre ar c'hartier,
Ar vèleyen, dabord, a vutun oll cazi,
Ma ne lacont en corn e lacont en o fri,
Hac a zo tud santel, savet en doctrin vad :
Ma ve ta eur pec'het, e teufent d'e güittât.

SIMON.

Me ne bretantàn qet dont amâ d'o zamall :
Int a voar evit sur pe' reont mad pe fall,
Rac bea int tud fur, habil ha moderet,
Qercoulz gant ar Butun evel gant traou ar bed ;
Nonpas te ha da seurt zo evel diaoulou,
Nemet ar c'horn a ve bepret en da c'hinou.
Te voerzfe da vragou evit prena Butun,
Hac epad ma fumes, da dud a zo o yun.

Da vreg, da vugale a varv gant an defot.
Eur vech vit caout Butun te voerzas da ribot,
Er rojout' vit tri goennec hac hi o coustout deg,
Tri goef, tri mouchouer hac un invis da creg,
Ar pez a zo caus dèi da rêi did mil mallos,
Ha da glasq an ifern ellec'h ar barados;
Hac'hoaste' goaldrêtas gant troad eur gos rastel,
Balamour ne voerze he brôs hac he mantel.

POL.

Ia, hi' lavar ze; mes qementse zo gaou,
Ha brassoc'h eguet se a deu eus he guînaou,
Rac pa ve en coler eo evel eur serpent,
Em c'harg a vil mallos, traou vil hac insolant.
Ha ma elfe bea mestrez d'am braguezen,
E rafe dia, me gred, douguen he güeleden.

SIMON.

Commanç dre vea fur, den brao ha moderet,
Ha qüitta ar Butun evel eun drouc-speret.
Da vreg zo coant ha fur, hac eur boanieréz vat,
Mes te zo he bourreo, he zirant, den ingrat!
A deu d'he goaldrêti, pa vanc dide Butun,
Hac e lêzes anêi ha da vugale da yun,

POL.

Penos qüittât ar Butun, Simon an Diboellet?
Güell ve ganén mervel ha bea dibarfoeltret;

Rac o tont da vervel n'em be nemet ur boan,
Haco chom hep Butun n'on qet qüit gant unan.

SIMON.

Brêmâ e credàn ferm ar pez a meus lennet
En eur fablen goechal, pa voan gant va dêved,
Penos voe ar Butun a voe caus da Gâin
Da goea en dizesper ha da ober goal fin ;
Rac Caïn voe'r c'henta a labouras an douar.
N'ouzòn qet pegant franch pe bal, den n'er lavar.
P'en devoe labouret, destumet al louzou,
Ha laqet gantàn oll ar re fall a vernou,
Evit dont d'o dêvi eno var an dachen,
Ha teuler al ludu en creiz hac en daou ben,
Louzaouen ar Butun en em gavas ive
Etouez al louzou all. Caïn ne vouie doare,
Qen a zantas ar c'hoez dioutàn o têvi,
Hac antren aneàn ar mogued en e fri ;
Ma commanças stressial' vel eun den counnaret,
Ha da gonsideri petra voa ar sujet.
Qerqent hac én fouilla, ma cavas eun tam had
Ne voa qet c'hoas dêvet, hac en hanvas TABAC.

Calz a dud a zònj dê Tabac a zo gallec,
Mes en em drompla'reont, rac certen ne dê qet.
Tabac zo eur guer hebre a sinifi bocen,
Pestilanç, droug-ar-c'hi, calz a draour all ouспен.

Louzaouen injin fall a hanver anêi c'hoas,
Qement e zêo noazus d'ar re vian ha bras.
Da viana Caïn' voe ganti goal droublet.
P'an treas en e benn an nerz eus ar moguet.
Eun nebeud goude ze ec'h êruas Abel,
Breur unic da Gaïn, eun den fur ha santel,
-A c'houlennas outâ: Vabreur, petra' c'heus grêt,
Ma zê da zantimant ha da speret troublet?

Irvin daonet, me Caïn, tec'h prest dirac va faç,
Pe me a parfoeltro hac a tolo d'am chass.

Abel' voe qer spontet ma coeas d'an douar ;
Caïn, evel eur c'hi clânvêt gant ar gounnar,
A zaillas var e vreur hac er lazas timat,
A laqas an douar da rusia gant ar goad.

Cetu qenta massacr a voa bet êruet
Divarben ar Butun, louzaouen milliguet ;
C'hoas ne voa qet avoalc'h, rac Caïn goude ze
Pa voe bet tamallet, gourdrouzet gant Doue,
Pa velas pebes muntr ha crim en devoa grêt,
A goeas en dizesper hac a zo bet daonet,
Oll diaoulou an ifern, pa voe daonet Caïn,
En em gavas gantàn p'oat ouz en entêri.
Ma er c'hasjont gante var eur menez huel,
Hac e laqjont e gorf da zec'ha en avel.
Pa voe neuze sec'h mat ha crazet a fêçon,
En e gargjont neuze demeus a boultr canon ;

Hac etouez ar poultr-se e fourjont pacajou
 Alumettez chimiq, coton-poultr a zac'hadou.
 An traou-ze oll eta en e vemprou fouret,
 A dleye, a dra zur, ober calz a effet.
 Neuze' rejont eun toull ebars en e goste,
 Da zervich da amors er c'horf milliguet-se ;
 Laqat an tân varnàn evel var eur c'hanon,
 Ma foeltrjont bibennou ebars en peb canton.
 Hac eus eur pacad bras a Vutun infernal,
 Unan a yas er Spagn, un all er Portugal ;
 Unan' yas en Brô-Zos, un all en Itali,
 En Allamagn, er Suiss, en Holand, en Turqi ;
 Mes al loden vrassa a voe stringet en Franç,
 Dreist oll en Breiz-Izel, d'hon daoni en avanç.

Var Paluden Maran, er guêr a Vontroulez,
 E coeas eul loden, n'en dê qet hep soùez,
 Rac sònj a voa dija (eus a ze e zoar sur)
 E vije er plaç-se grêt eur Manufactur,
 En pini e vije implijet merc'het coant,
 Gant o muzellou ros hac o dent olifant,
 D'ober cigarennou pleguet brao, grêt parfet,
 Ar pez' ra m'int hanvet Cigareterezet.
 Piou' elle resista da fumi eul labour
 Grêt gant an oll graçou ha biziet qer flour ?

Stlapet e voe ive ebars en Normandi,
 Er Chin, en Tartari, er Pologn, er Russi ;

Anfin, strinqet e voe dre bêvar c'horn ar bed :
Er sêçon-ze ar Butun zo en em c'hriennet
Dre an oll brovinçou, dre voyen Belzebut
Ha Caïn milliguet, evit peur-goll an dud.

Ha te, evel Caïn, a velàn a zo prest
Da goea en dizesper ha da c'hoari da rest.
Sepet ma po Butun, ne res nep câs ebet
P'en devo naon da dud, pe o devo sec'het.

POL.

Eur baciantet vras a meus ouz da glêvet :
M'am c'hreten, me em boa da balatoqinet ;
Mes güelet a ràn sclêr n'out nemet eun azen,
Ha te grêt da studi; ne ouzout qet ouspen.
Da argumant zo faus ; te gomz vel eur C'hozac,
Particulieramant var ar guer a Tabac.
Te lavar ê hebre, me lavar n'en dê qet,
Hac a deu d'er zouten dre'r pez a meus lennet.

Pa voe goechal ar bed abimet en antier
Gant doureyer an diluch, certain e voa mizer ;
Noc a ras eun arc'h dre ordrenanç Doue,
Evit e gonservi, én hac e vugale.
Pa voe bet er guis-se eur pennad var an dour,
E leusqas eur vrân du, darn a lavar eur scour,
Da c'hout hac hi' gavje tam douar dizolo,
Pe eur mene benac en eun tu var an dro ;

Ar vrân a eure goap ouz Noe ar barveg,
Rac chom a ras da bica charoncet gant he beg.
Mes Noe, pa velas ne deue qet var he guis,
A leusqas var he lerc'h goude ze eur goulm gris,
Pini a zistroas, ar goulmic beniguet,
Hac eun deillen Butun serret mat en he beg.
Neuze en devoe joa ar barveg côs Noe,
Rac e ras eur sermon eno d'e vugale,
Var sujet ar Butun, ha rêzon en devoa.
Rac ar goulmic e d'oa e beurgarguet a joa.

Neuze Noe ractal hac en henvel TABAC,
Nonpas en ies hebre, mes en ies syriac;
Ha pa ve expliqet en langach brezonec,
E sinifi qêlou mad, boneur bras hep abec.

Noe neuze qerqent a gomz d'e vugale :
» Ho pet soign, emeàn, eus al louzaouen-ze ;
» Onnes zo' louzaouen, ha ma oufe an oll,
» A ro calz a brofit, hac a vir ouz ar c'holl.
» Da guenta e zêo mad' vit en em gonsoli
» Diouz maliç ar grague, pa vent en o furi.
» Laqit eur c'hornedad, sortiit prontamant
» Ermes demeus an ti evel rac eur serpent,
» Ha lavarit en latin, mes en un halanad :
» *Liberanos, Domine.* Hon delivrit, Autrou mad
» *A fulguræ et tempestate.* Ha lavarit goude ze :
» Diouz ar foeltr, an tempest, va mirit, va Doue,

» Ha laqit eur c'hornedad var ho paciantet ,
» Ha souden e sortio ar goler diouz ho creg. »
Bremâ, Simon, eleal, n'oufes qet contesti
Na disputi diouzòn, en despet da studi.

SIMON.

Contesti' rafen ouzit, ma vez den rêsonabl;
Mes eun den re fall out, se zo incontestabl.

POL.

Da fri e Landerne, Simon ar Gontel Gam.

SIMON.

Ha te, qê en da rout, Pol ar Pri den infam.

POL.

Butun ! Butun atao, en dispit da coler,

SIMON.

Ia, Butun e po, ha gantàn peb mizer.

POL.

Lavarat ràndid c'hoas : sepet m'am bo Butun,
Eus an oll mizeriou ne meus aoun ouz nicun.
Butun ! Butun atao ! hep diner na çantim. ...

SIMON.

Adieu, fri capottet, coll a rez va estim.

F I N .

